

Tik ha tik, ha tik ha tak
 Piw a baeo 'r vilin-mañ ?
 Sac'had hemañ,
 Sac'had henhont,
 ... An houarn-bras
 Hag... an ene !

(An houarn-bras eo an ahel penna er vilin).

Piw, e-lec'h Piou, da ziskouez doare-distaga Tregeriz. Ar W a glever gant ar vogalenn da heul : *Pi* wa *BAE* o'r *Vi-lin-MAñ* ?

PEDENNOU ISKIS BET KLEVET ER SKLAERDER PERROZ-GIREG

N'ouzon ket pe dalvoudegez e c'hellont kaout e-keñver ar yez, marteze o deus muioc'h e-keñver ar werinoniez. O lakaat a ran amañ dres evel m'am eus o c'hlevet, gwerzennoù a bep ment enno :

a) Pater Noster er Greuseufi,
 Jezuz Krist 'n Evanjeli ;
 An hini'ouife hag a lârfé,
 Teir gwech en noz, teir gwech en de(iz),
 Tri ene a c'houne(z)fe ;
 Hini e dad, hini e vamm,
 E hini e-unan 'rafe ive(z).
 Tri de(iz) ha teir noz kent ma varvfe
 E ouife petore koste(z) ec'h afe.

b) D'am gwele ha pa 'c'h añ
 Tri ael gwenn a saludañ,
 Un'n em c'halon, un'n em fenn,
 Kroaz Jezuz Krist em c'herc'henn.

Mark ha Maze, Lukaz ha Yann,
 Pêr ha Paol, an Aotrou Sant Yann,
 C'houi eo ive(z) Tri Fost ar Bed (?).
 O ma mirit ouz an Droukspered,
 Hag en-dihun hag en-kousket
 Bremañ hag en eur diweza.

(*En-dihun hag en-kousket* : stumm Treger da lavarout : ez-dihun, ez-kousket. Ar stumm reisa a vefe; end-dihun, end-kousket ? (kv. :end-eeun). Perak ne vefe, ket degemeret ar stumm-mañ er yez unvan ?)

c) Mar deufe tra d'am sourpreniñ
 Gwerc'hez Vari, 'n em brezantit d'iñ.
 Me 'ro va c'horf da Zoue 'n Tad,
 Va memor da Zoue 'r Mab,
 Va spered d'ar Spered Santel
 Ha va ene d'an Tad eternal.

Benedicite, 'lere Doue ('lavare Doue)
 En noz 'n e wele pa ziskenne.
 Pêr ha Paol a responte,
 An Aotrou Sant Yann a rae ive(z).
 Doue da bardono 'r gwele,
 Ar c'horf hag ene
 A ya ennañ da c'hourve(z).
 Mar deu gwall-dra war va zro,
 'N Aotrou Doue hen chaseo.

d) Em gwele ha pa 'c'h añ,
 D'eoc'h, va Jezuz, 'n em elbedañ (erbedan)
 Da Jezuz, d'an Drinded,
 Ha d'ar Werc'hez Sakr venniget,
 D'an Itron Varia Rozêra,

Ha d'an Itron Santez Anna,
 D'an holl Sent ha Sentezed,
 Dre m'am eus pec'het.
 Me ho ped, Jezuz, va fardonit,
 An Dreinded, va eskuzit,
 Er baradoz va resevit !
 Kroaz Doue, Kroaz Krist,
 Kroaz va Salver Jezuz Krist,
 Lakaet em c'herc'henn treuz ha hed,
 Hag en-dihun hag en-kousket
 Bremañ hag em eur diweza !

(teurel evez ouz ar c'hemmadur « venniget » o
 tegouezout en eil ano-gwan war-lerc'h an ano kadarn
 gwregel)

EVEZIADENNOU DIWAR-BENN YEZ TREGER

DISTAGADUR :

Ar gensonenn H.

Peurvuia e vez c'houezet an H e tregerieg. Pe mar
 kirit, eur reolenn voutin eo e vez c'houezet an H e
 tregerieg. Da skouer : *Hir, Had, Heskenn, Hounnez,*
Hennez.

Direizderiou : Ne vez ket c'houezet an H :

1° War-lerc'h ar ger-mell AN. — Da sk. : An had
 (an nad).

2° E darvoudou 'zo, mar deo stag ar ger o te-
 raoui gant H ouz ar ger araok ha mar ne reont e
 gwirionez nemet eur ger hepken en distagadur.

Da skouer : Mab henañ (mapenañ).

Hogen en darvoud-se, mar deo dibenn ar ger-